


Pennherez ar miliner

Mélodie



Air en mode de La

Pennherez ar miliner, dimeus e wreg kentañ,
'gasas he zad a gostez, hag a lavaras d'añ

! pennouez !
(dezban)
! id-du !

(Dje) lou lou
- Dibili
Traou linli la

« Me ho ped ma zad, eme'i, pe valiet ed-du,
o, da viro danvez ar c'hampouezh, pe gaviet ho tu. »

« Pelec'h ma merc'h, emezañ, 'mo me na bleud na brenn
P'emañ ar c'hloareg dindan, pe e vreur war ar gern. »

« Laosket - è (met), emezi, me o c'haso ac'hon - se
O, benn ur pennadig amañ, me 'zistago (d'è (v)) o c'hezeg.

Me a zistago d'è (v) o c'hezeg ha laosko da vale,
Ha 'benn ur pennadig goude, me yay da lâred d'è.

Terripl ac'h paotred, emezi, terripl ha disoursi,
distaget eo dac'h ho kezeg, ha laosket da vale.

(= deoc'b)

Distaget eo dac'h ho kezeg, ha laosket da vale,
ya, gant ur vandenn kailhoc'hed a zo tremenet aze. »

« Laosket d'è eme ar c'hloareg ne (z) aint ket da bell-vro,
pe n'omp malet 'n hon sac'had, 'n un tu, me o c'havo. »

Pen emañ ^{malet} leun ar sac'had ha touchet an arc'hant
eo bet klasket ur gomer dont d'evro gwin-ardant.

Mont a reint d'an ostaleri n'on gontañ o doare
- « O petra a gemit - hu ma gomer, kar me 'mo lodevi ? »

(n'on = en ur, o)
(c'hwil)

Heñ'zh zo un dra a ^{sach} gas nerzh ha gouezh 'n hon izeli.
Met dre forzh derc'hen evañ, dont a romp da ve(z)viñ. »

(izili)
(derc'bel)

Pen oent karget o bou'elloù 'oent ^{deuet} aet war ar ru,
'oant ket 'vit bale gwall-blin, brallo raint an daou du.

(blin = blaen)

Unan 'nè (v) a lavare - « Ha poent eo mont d'ar ger. »
hag eben a lavare : - « Me 'm oa-me foar d'ober. »

« Ha me 'm eus c'hoazh da brenañ soavon, rousin ha holen,
Hag ar butun a zo manket 'ba ma zabatierenn. »

An da(v)añjer a oa kollet hag (ar) vrozh a oa freget
hag ar c'hoef un tammig bihannig 'barzh an drez oa staget.

« Debret 'm eus ma zakezenn ^{ya} gant ur strouilhenn draoù.
Da betra in - me bremañ ? D'o(er) marc'hadourezh koefoù. »

! c'bin !

D'or

Kanet gant Marsel Guillou. Laroven.
Serret gant J.Y. Thoraval, 1976.